

CANTIC SPIRITUEL,

VAR BUEZ SANTEZ EODET,

GUINIDIG A ESCOPTI LEON.

Var ton Guers Theophilus.

CLÉVIT oll, tud yaouanq a escopti Leon,
Clévit ur Vers nevez a doucho ho calon,
Composet er bloa-mâ en honor da Eodet,
Ur Zantes a Leon, herves ma zeo scrifet.

A gastel Tremazan, e pares Landunvez,
Galon, uh dijentil eus ar c'haera lignez,
A zeuas da eureuji, evit genta pried,
Merc'h ar Prinç eus a Vrest, Floranç voa hanvet.

Bugale o devoe, mes oll n'o hanvan get:
Unan eo Sant Tanguy, un all Santez Eodet;
O daou pa gommançont caout uzach a rêson,
Gant o mam e voent disqet da ober orêson.

Da bratica'r vertuz, chasseal ar pec'het,
Da dec'hel diouto, evel dious serpentet;
Ar pezh zo necesser a rea ar vugale,
Evit, goude ar maro, mont da velet Doue.

Hoguen ar maro cris, dinatur hac ingrat;
A lamas digante ho mam santel ha mat;
A roas de, siouas, ul lesvam millignet;
Carguet eus a valiç ebars en o andret.

Ur bloas goude maro demeus a Floranç,
Galon e Brosaos a c'has d'en em renta;
Eno un demezel souden a eureujas,
Huel a galite hac eus a valiç bras.

E castel Tremazan pa voant en em rentet,
Pelec'h voa Sant Tanguy gant e oll c'hoarezet,
Souden ar vam nevez, guir lesvam leshanvet,
A gommanç d'o zreti evel un drouc-speret.

Nemet ar blasphemou ha mallosiou infam
Na gléo an daou vugel a c'henou o lesvam,
Evel torfetourien ouspen hi o c'hanne,
Hep nep respet d'o zad' pini e zamalle.

Sant Tanguy alafin o tont d'em em squiza,
Goude eiz bloas bemdez bet trêtet e c'his-mâ,
Gant conje mat e dad e yas prest da Paris,
Evit ous e lesvam evita ar valic.

Criz vize ar galon na zeuje da ouela,
O velet Sant Tanguy o tont da guiniada
Dious Santez Eodet, e c'hoar muia caret,
O facou dê o daou gant daelou golet.

Penaos, va breur Tanguy, eme Santez Eodet,
E teuit d'am dilezel da veza bourreviet?
Mes n'ouffemp pareat, arêtemp hon daelou,
Guell e ve ma souffren eguet souffr hon daou.

Sant Tanguy o ouela, na elle qet parlant,
Gant truez ous e c'hoar, a gar parletamant;
E galon gant glac'har a zo qazi rannet
O clêvet ar c'homzou eas e c'hoar Eodet.

Allas! Eodet, bremàn cetu c'houi oc'h-unan,
Ruillet viot bemdez dre gastel Tremazan
Gant an treid milliguet eus ar bleizez infam
Zo couet deoc'h e partach clec'h ur guir lesvam.

Eodet, goude beza ous he breur qiniadet,
A bromet da Zoue souffr gant paciantet
Eus a bers he lesvam an oll insolancoù,
O respeti senti hep clasq nep rêsoniou.

He lesvam er c'hontrol, a redoubl a valic,
Dre moyenou neves e zourmant e pep guis,

O velet e qare vaqi d'an orêson,
 Evit dont d'e ampech, cetu amân ar rêson.

Darn he demezelet ha servicherezet
 A gassas en ho hent evit caout ur sujet
 Da ober da Eodet labourat incessamant,
 Er c'hamprou, er gueguin, hep dezi nep damant.

Dirac he orator bars en he c'habinet,
 Oc'h ober orezon alies voe cavet;
 Mes he lesvam mechant qement-se pa santas,
 Orator, cabinet, tout en o ranversas

Pa sonet er chapel ar c'hloc'h d'an oferen,
 Peini a gare da glêvet pen da ben,
 Labourat er geguin ha guere'hat an oll dour,
 Neuze e oblige hep rêi dezi sicour.

Ous he zad, he lesvam, biscoas ne voe disent;
 Gant respet bras e rê qement a ordrenent :
 Pa ne alle en deiz vaqi d'an orêzon,
 An darn brassa en nos er rê a vir galon.

Gant avis he directour e promet da Zoue
 Birvigen, emezi, pried ne devize,
 Evit gallout bemdez sonjal er bassion,
 A voa sur, pa alle e, occupation.

Gant he mam Florança e devoa bet disqet
 Donet da soulaji ar beorien ezomet.
 Calz eus he repasiou goude a rezerve,
 Hac hep gout d'he lesmam deo ractal er c'hasse.

Un devez dre goal chanch e rancontras Eodet
 O cas an aluzen d'ar beorien ezomet,
 Hac eno var ar plac gant outrach e c'hannas,
 Ha bara ar beorien gant he zreid a flastras.

Goude e veza bresset d'ar chass prest en tolas,
 En despet da Eodet, da Zoue er c'hrouas;
 Ar Zantez paciant, hep lavaret ur gucr,
 A return d'ar c'hastel da offr oll d'hor Zalver.

4
Caer e devoa he lesvam dont d'e fersecuti,
Na fallout qennebeut dont d'e ancanti,
Ar brud eus he vertuz partout a voa scuillet,
A denne an noblanç da zont oll d'e guelet.

O velet qementse, e arrach a gresqe;
Pa velas an noblanç a guenta qalite
O tonet d'e reglasq evit e eureuji,
Hac a hep avantach o tont d'e assuri.

Bete bremàn Eodet so bet indifferant,
Oll qement tra a zouffr a zouffr hep nep damant;
Mes dont da zemezi biqen na gonsantje,
Goude rêi da Jesus he c'horf hac he ene.

Er fêçon-mâ dezàn ec'h adress e feden:
Jesus, va guir bried, permettit e varfen
Qent evit birviqen terri ar bromessa
Pini a meus great deoc'h hac a ratifiàn.

Ar valic eus he lesvam a servichas dezi
Da ampech ma rancche donet da eureuji,
O velet ezedo on un estim qer bras,
Prest pell dious ar c'hastel var ar meas e c'hassas.

Eno en un tiig hac én meurbet dister,
Bemdez e orêzon a offre d'hor Zalver,
Ha calz a œuvrou-mad bemdez a exerce
En andret peb-unan ha guella ma elle.

Cals a blac'het yaouanq a voa bars er c'hanton
Dre e scol hac e exempl touchet en o c'halon,
A renonças a grenn da vaximou ar bed,
En em roas da Zoue dre garantez barfet.

Erfin he breur Tanguy a Baris distroet,
E castel Tremazan prest eo en em rentet,
Hac hep e anaout er zal voe cunduet,
E pelec'h ma voa calz eus a zemezelle.

Ha pa voa gant an oll gant respet salûdet,
Souden e c'houlennas pelec'h edo Eodet,

Qer buan e lesvam en tennas a gostez,
E son'al e c'hlaspje evit ober al lez.

Neuze an traitourez a lavaras dezàn :
Côves ar virionez ouzoc'h a zeziràn ;
An demezel Eodet a zo ur plac'h collet,
Zo ur prostitueta a guement a gafet.

He obstination, he buez debordet
D'he c'hass var ar meas en deus or c'hontreignet
E clasq, allas ! golo gant guell facilitate
Malheur un demezel demeus e c'halite.

O credi re vuan, Tanguy a zortias,
Gant coler ar brassa e c'hoar a glasqas
E qichen ur feunteun e voalc'hi e dillat,
Evel ma er guelas en e galvas timat.

Eodet pa er c'hlêvas a gommanças tec'het,
Rac ma zoa ganti oll dianavezet,
Mes én ous e foursui neuze prest e zrapas,
Ha gant un tol cleze a grenn e dibennas.

Pa oa couezet d'an douar, o velet he bruchet
Carguet a lêz-caoulet hep gouzout ar sujet,
Dious an amezeyen neuze en em informas
Eus a vuez Eodet, ar pez en estonas.

An dud oll glac'haret a lavaras dezàn :
Bevet e deus Eodet assur bete vrêmàn
Gant peb seurt santelez, exempl vad er c'hanton ;
Glac'har vras hon eus dezi eus a greiz hor c'halon.

He lesvam cris, allas ! e deveus hy chassæet
Eus a gastel he zad hac amàn banisset
Gant peb seurt paourentez, al lêz oc'h eus guelet
Da zoulaji ar paour e eus voa destinet.

Pa en devoa Tanguy ar virionez clêvet,
E voe dare dezàn mervel gant an despeta
Gant queuz en e galon d'e beza dibennet,
O credi re vuan e lesvam connaret.

D'ar c'hastel e teuas da gaout e dad Galon,
En eur scuilla daelou eus a greis e galon;
Pa antreas er zal e dad a rancontras,
Qer buan d'an daoulin dirazàn en em stringas.

Eno e tislêryas : me eo ho mab Tanguy,
A verit ar maro, hep caout nep damant din
Allas ! siouas, allas, va c'hoar muya caret
Gant un faol cleze ameus het dibennet.

E vouela da Eodet pa voant eno o daou,
Al lesvani voa e joa guelet oll e canvou;
Souden e creiz ar zal, Eodet a antreas
He fenn en e daouarn eno ec'h apparissas.

Eno var he gouzoug e fenn a appliqas,
Hac evel diagent outi en em stagas;
Qerqent ous he lesmam e tro publiqamant,
Hac evellen outi e commanças parlant :

Pep tra oll er bed-mâ en devez e amzer;
Doue betec ur poent a zouffr gant ar pec'her,
Ho malic en devez souffret bete brêmâ,
Emâ o prepari donet d'o punissa.

Adieu eta, lesvam dinatur hac ingrat,
Deut eo an heur brêmâ deomp d'en em guittat;
Great eo ac'hanoc'h, prest eo coler Doue
Da gueza var ho penn pad an eternite.

Ur c'hren qen violant eno e e'bemeras,
He entraillou couezet gant he zreid a bressas;
Erfin gant e arrach d'an douar en em stringas,
Hac evel ma velot he buez a finissas.

Aziouc'h ar c'hastel ar gurun o trouzal,
A zeuas da sponta qement a voa er zal,
Qer buan o coeza e crevas an doen,
Hac hep offancin den he losqas pen da ben.

An dud oll estonet a deuas da grenâ,
O vet un itron eus a greis he joa

Ebars en un instant e lodu voe rentet,
 Allas! hac he ene livret d'an drouc-speret.

Incontinent Eodet ous he breur a droas,
 Hac ounta publicamant evelen a gomzas :
 Pa em guezoc'h, va breur, me n'oc'h anayen get,
 Ar pezh a roas din guir sujet da dec'het.

Mes cusul hon lesvam a oun erfat brêmâ
 Eo bet deoc'h ar sujet da zont d'am dibenna,
 Ha rac se ar Verc'hes meus pedet a galon
 Da c'houlouen evidoc'h digant Doue pardon.

Qer buan d'an daoulin Tanguy en em strincas,
 Ous e c'hoar a galon pardon a c'houlennas ;
 Pardon va c'hoar, pardon d'o peza massacret,
 Va c'halon gant glac'har a zo qazi rannet.

He oll sacramachou goude a recevas,
 Hac ebars un instant adare e varvas ;
 Neuze gant an ælez d'an ên voe cunduet,
 Endra pado Doue da veza curunet.

He e'horf goude a voe enterret gant henor
 E pares Landunvez peurdost da vord ar mor ;
 Eno e deus-great calz eus a viraclou,
 Aboa voa he ene er gloar eus an ênvou.

Perac, oll tud yaouanq, coulz ha Santez Eodet,
 Ne sentit ous ho tud, renta dezo respet?
 Perac ne andurot pa en deveus anduret
 Gant ul lesvam cruel a guement a gafet?

Perac dious ar pec'het hac an occasion,
 Na dec'het couls hac hy hac ober orêson,
 Pa zeo guir ar Verc'hes rac an æl a spontas,
 Ha Santez Eodet rac he breur a dec'has?

Perac, pa zoc'h fragil evel m'eo ur pod pri,
 N'o pezo get a spont hac er mez hac en ty?
 Rac an occasion da goueza er pec'het,
 E fot tec'hel outi calz a dud so daonet.

E chom re dost d'an tan e teuer d'en em boazat,
 E chom dindan ar glao en em glebier timat,
 Evit en occasion na guesset er pec'het,
 N'oun nemet tri remed : tec'het, tec'het, tec'het.

Tec'het prest... ar maro bemdez a didosta,
 Mar guell o surpreno pa zonzoc'h nebenta ;
 Calz eus a dud yaouanq oc'h eus anavezet ;
 Hac a greis o yec'het he deveus discaret.

Queuz o pezo neuze fot da veza heuillet
 An exempl a vertuz eus a Zantez Eodet :
 Commancit eta brêmâ da veva evelti,

Hac e viot en ên curunet coulz hac hi.

Pelloc'h eta, pa viot gant ho tud goal drêtet,
 Ous castel Tremazan troit prest ho speret ;
 Gant he lesvam eno petra souffr Eodet,
 Sonjit ha grit evelti, gant Doue viot paet.

Ar verz-mâ zo dediet da yaouanqis Leon,
 P'en hini, mar qeront, e cavint ar feçon
 Da bratica ar vertuz caret Doue a galon,
 Dre exempl ar Zantez bevet en o c'hanton.

Itron Santez Eodet, bezit avocadez
 Da yaouanqis Leon, heuilla rint ho puez ;
 Oll guella ma illint en amzer da zonet,
 Cbetu amàn àr c'hontrat ganto oll goarantet.

Etrezomp, tud yaouanq, a escopti Leon,
 Pelloc'h e promettomp demeus a guir galon
 Imita ar vuez eus a Zantez Eodet,
 Evit goude'r maro mont d'an ên d'e guelet.

F I N.

E Montroulez, e ty LÉDAN, e ru ar Vur.